

KANNAOIG

Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 88 Here-Du-Kerzu 2014 Priz : 3€

Prederiadennoù dibenn-bloaz

Teulfilm war an FLB Kounlid Anna Breizh

E-kerzh miz Du ez eus bet skignet war ar chadenn skinwel *France 3* un teulfilm e div rann war an FLB, ma weled ennañ izili kozh eus an aozadur kuzh breizhat o kontañ o c'hurioù, hag o deus, petra bennak ma vefe mennozh pep hini ac'hanomp war o obererezh feuls, dihunet spered Breizhiz diouzh o stad morgouket.

Gourfennañ a rae an teulfilm gant un ezel kozh o tiskleriañ : “Degouezhet eo Mitterrand (evel Zorro e *Spanish California*, em eus soñjet), freuzet en deus raktres ar Greizenn Derc'hanel e Plogow, ha dieubet an holl brizonidi FLB”. Santet em eus e wele Mitterrand evel ur salver : gant ar Sokialourion, paotred vat, e teufe an traoù da vezañ gwelloc'h evit Breizh. Ankounac'haat a rae en doa Pompidou graet heñvel o tieubiñ prizonidi an FLB 1 evit chom hep kaout ur prosez-arvest, en dije broket da louzañ e renerezh. E pep keñver, an emsaverion o treiñ kein ouzh ar stourm broadel evit kemer hini ar gleizelouriezh n'o deus ket klaoustreet war ur marc'h gwelloc'h, peogwir n'eo ket c'hoazh adunvanet Breizh, ha nevez 'zo, an darn vrasañ eus ar gannaded vreizhat sokialour hag o doa lavaret en a-raok edont a-du gant adunvaniñ Breizh o deus mouezhet holl, nemet daou, mar ne fazian ket, evit ul lezenn a vir ouzh Breizh da vezañ adunvanet : etre Breizh hag o strollad politikel

gall o deus dibabet o strollad. Anna Breizh, hon Dugez diwezhañ, he devoa-hi stourmet kalonek evit mirout da Vreizh he dizalc'hiezh ; hag hevlene ma-z eo bet kounlidet pemp kantvet bloaziad he marv, hor boa goanag e vije bet ivez bloaz adunvanidigezh Breizh, gant he c'hastell e Naoned ma voe bet ganet ennañ, e-barzh. Siwazh ne vo ket, ret e vo deomp gortoz c'hoazh. Emaomp e pinienn evit ar mare gant

hor c'hannaded dihentet ha gwerzhet d'an enebour, hogen Marie-Julie Jahenny, diouganerez Blaen, he deus diouganet e vefe adunvanet Breizh en un doare arbennik, neuze pedomp anezhi, Anna Breizh, hag holl sent Breizh, ma-z eo diaes amañ ober al listenn anezho, ken niverus ma-z int, da erbediñ, ouzh an Aotrou Doue, evit hor paourkaezh Bro, gwallgaret gant lod he bugale.

Un istor gall

Kement hini a zo bet er skol republikan gall a oar an dra-se : n'eus ket er bed-mañ gwelloc'h yezh eget ar galleg ! Dindan pluenn ar gelaouennerion hag ar skrivagnerion e vez lennet an dra-se ivez, muioc'h eget ur wech ; gant lennerion ar c'helaouennoù hag ar magazinoù a skriv d'o c'helaouenn vuiañ karet evit klemm pe evit reiñ mel d'an hini en deus skrivet ar pennad-mañ-pennad en deus plijet pe zisplijet dezho, e kaver alies ivez ar meneg-se eus ar galleg evel kaerañ yezh ar bed, o kounañ e oa gwechall yezh ar rouinellerezh er bed a-



bezh, ha komzet gant ar vrientinelezh¹ en holl lezioù Europa, ur yezh ma-z eus tu da zisplegañ ganti, traoù eus ar c'hempleshañ zoken, en un doare sklaer, urzhiet ha meizadus. “*Divreinadus eo ereadurezh ar galleg*, a lavare Antoine Rivarol en e areizh² war hollveziadelezh ar galleg e 1782, *ac’hano eo ma teu ar sklaerder estlammus-se, diazez peurbadel hor yezh. Ar pezh n’eo ket sklaer n’eo ket gallek*”.

Hogen, a-daol-trumm, badadao ! Ne oa mui sklaer ar galleg e kambr ar gannaded c’hall e-kerzh miz Here. Soñj hoc’h eus marteze eus ar pezh a c’hoarvezas : ur c’hannad, Julien Aubert, o komz ouzh an Itron Mazetier, prezidantez an dalc’h, a lavaras outi “*Madame le Président*”, pezh en deus displijet d’an Itron-se a fellas dezhi rediañ ar c’hannad Aubert da implijout “*Madame la Présidente*” outi.. Nac’h a reas, o tec’hervel d’e harpañ ar yezhadur gall, Malherbe, hag an Akademiezh C’hall, met koll a reas hag un tell kastiz a voe lakaet war e choug. “Ne oa nemet ur frapad klezeiata izel ha skañv etre Gallaoued o klask kuzhat o dizemglev don”, a lavaras din va mignon Paol Kalvez, hogen, pa soñjan en doa graet an dispac’her Barrère de Vieuzac eus ar brezhoneg hag eus yezhoù all estreget ar galleg komzet er C’hwec’hkogn : “*jargons barbares et idiomes grossiers qui ne peuvent servir que les fanatiques et les contre-révolutionnaires*”. Koulskoude, n’eus kudenn ebet e brezhoneg, da lavarout “*Itron Prezidantez*”, evel ma lavarar “*Itron Renerez*”, ket muioc’h eget er yezhoù all, da skouer en alamaneg : “*Frau Kanzlerin*” (Itron Kanzellerez). “Se n’eo nemet un istor gall evel ma vez istorioù “belgiat” pe “yuzev”, en deus ouzhpennet va mignon Paol, emañ ar gwir gantañ marteze ! An Itron Alliot-Marie, an hini nemeti bet Maodiernez an Difenn en ur gouarnamant gall, he deus brouezet a-enep an Itron Mazetier o tifenn ar reolennoù-se eus ar galleg hag o tegounañ he zremen e Maodiernez an Difenn, ha peurgetket a-zivout ar verdeadurezh brezel ma vez degemeret enni bremañ ar merc’hed, he deus goulennet : “*Quel est le féminin de “second maître ?”*” Evel-just, o komz eus “*seconde maîtresse*” e soñjfed muioc’h el loeroù-kas-c’hoant eget e bechenn ruz ar martolod.

Met an diaested a azasaerezh-se e galleg, pa vez daskemmet ar reizh person a rae dre voaz ur

¹ Brientinelezh : *aristocratie*.

² Areizh : *discours*.

vicher, a zo talvoudek ivez evit ur gwaz oc’h ober ul labour tonket betek-henn d’ur vaouez. Da skouer, va merc’h-kaer, bet n’eus ket pell en ur glinikenn gwilioud, a zo bet souezhet o welout ur gwaz o tont daveti hag o lavarout dezhi : “*Je suis la sage-femme*”. E brezhoneg ma vez “*amiegez*” ar ger evit ur vaouez, e vefe implijet “*gwiliouder*” evit ur gwaz.

Skeud un dislavar

Bet pedet da zigorlid stavelloù³ nevez an *IDBE (Institut de Documentation Bretonne et Européenne)* e Gwengamp d’an 18 a viz Here 2014, e oa staget, er bedadenn a zegemeris, skrid un dazaters gant Erwan Fouéré a-zivout e dad, Yann Fouéré, Doue d’e bardono.

D’an aters-mañ : “*Petore plas e talc’he ar Gatologiezh e buhez personel Yann Fouéré hag en e welidigezh eus an hennadelezh breizhat ?*” e responte : “*Evit Yann Fouéré, pleustrerezh ar relijion a selle ouzh ar vuhez prevez*”. Sachet eo bet va evezh gant ar bomm-lavar-mañ : “*pleustrerezh ar relijion o sellout ouzh ar vuhez prevez*”, seul vui ma kroge an aters gant an haeradenn-mañ : *Al levr kentañ embannet gant Yann Fouéré a oa talbennet : “Les Saints Bretons et leur oeuvre nationale*”. Evidon e hañval bezañ un dislavar etre an daou dra-se. Ar relijion o chom en amgant⁴ ar brevezelezh a zo pezh a felle d’an dispac’h gall e teufe da vezañ, e diouer d’he distrujañ penn-da-benn, hag a zo bet, mui pe vui da heul, pal an darn vrasañ eus ar republikoù gall, gouvleinet holl gant ar Frankvasonerezh ; Goursened Vatikan II ma oa bet kemeret adalek an derou e renerezh gant ar c’hlann modernour ma oa ivez e izili pennañ dindan levezon ar Frankvasonerezh, a oa ivez evit ma chomfe ar relijion en amgant ar brevezelezh, gant e bolitikerezh eus an endoniadur⁵, pe, evel ma lavar ar C’hallaoued : lakaat e relijion en e c’hodell hag e frilien warni. Labour avielidigezh Sent Breizh war ar bobl vrezhon a zo bet an diac’hin-kaer⁶ d’an endoniadur-se, ha levr Yann Fouéré, ha n’em eus ket lennet, a ranke a-dra-sur diskouez an dra-se. Oberoù Sent Breizh a zo bepred beziat en hon amva pemdeziek, roet eo bet o anvioù da envel hor parrezioù, hon ilizoù, hor chapelioù-breuriezh. Ar breuriezhoù, aozadurioù breizhat a gaver e pep lec’h e Breizh, e kement lec’h m’eo

³ Stavelloù : *locaux*.

⁴ Amgant ar brevezelezh : *sphère de la vie privée*.

⁵ Endoniadur : *enfouissement*.

⁶ An diac’hin-kaer : *tout le contraire*.

bet komzet brezhoneg, ez eus bet roet dezho, da sant patron, Sent Breizh, zoken e Bro-Naoned : da skouer e breuriezhoù gwalarn ar vro-se am eus studiet e kaver da sant-patron : Miliav, Melar-Mereal, Efflamm, Glenn, Telo, Rihowen, Seog, Heodez, Balae, Kast, Samzun, Gwenole, Gwengar, Erwan... Ar pardonioù, hag a zo c'hoazh niverus a-walc'h e Breizh, a verk ne oa ket ar relijion un afer brevez met eztaol ur bobl gristen. En-enep "Fest-Yves/Gouel-Erwan" ma taver e ra dave da sant Erwan a ziskouez trec'h tuidi an endoniadur. Da vare an Dispac'h gall hag e heskinadurioù relijiel, emsavadeg ar Chouanted a zo bet ivez eztaol-feiz pobl Breizh kristen. Hiziv an deiz ma-z eo digristenaet kalz pobl Breizh ha ma ren enni un hiniennelouriezh arloupet e weler aze obererezh dalc'hus ar skol c'hall mennet da kas da benn palioù an Dispac'h gall, ha ne oa ket gourfennet c'hoazh evit ar maodiern Peillon.

Un eil moskeenn e Kemper

Klevet hon eus an dra-se : maer Kemper a vefe a-du evit ma vefe savet un eil moskeenn en e gêr, war c'houlenn Turkiz o chom eno, ar pezh ne oa ket diouzh gred un toullad mat a dud am eus gwelet o tiskelañ e straedoù Kemper evit ezteurel o enebiezh ouzh ar raktun-se. Soñj am eus c'hoazh eus pezh a veze klevet gant strolladoù an Emsav breizhat : "nebeut-tre a enbroidi ez eus e Breizh, ne dalvez ket ar boan komz eus an dra-se", hag a-daol-trumm setu ma savfe ur gudenn e Kemper, ne vefe ket bras a-walc'h ar voskeenn gentañ e kêrbenn Bro-Gernev. Iskis memestra, klevout a reer tud o klemm ouzh an dilabour a vefe o kreskiñ dizehan e Breizh, tud yaouank na gavont ket labour war-lerc'h dibenn o studioù, ret dezho divroañ da Vro-Saoz pe da Alamagn da glask fred ; hag e-keit-se, e vefe un toullad mat a enbroidi muslimiz o dije kavet labour e Kemper ha ken niverus e vefent ma vefe deuet re vihan o moskeenn gentañ, ret mat sevel unan all. Hogen pezh a hañval iskis ez eo e vefe ar voskeenn-se evit Turkiz, perak an anvad-se, Turkiz ne vefent ket evit en em glevout gant Muslimiz all, emañ marteze en o soñj lakaat da dalvezout aesoc'h luganoù Tevezeg Turkia, Recep Tayyip Erdogan : "Ar moskeennoù a vo hor c'hazarnioù, ar minaredoù hor fuzeennoù, hon toennoù-bolz hon tokarnoù, hag ar feizidi hor soudarded, evel ma

voe askounet⁷ gant unan a ziskele, ouzh mikro ur c'helaouenner.

Deurus kenañ, a-zivout darempredoù hor c'hevredigezh gant an Islam, ez eo bet dazaters an Tad Michel Viot, bet aluzener prizon e Blois etre 2004 ha 2014, gant TV Libertés. Diwarbenn danevell-skrid Guillaume Larrivé, ur c'hannad UMP, war ar saviad er prizonioù gall ma vez muslimat 60 % eus ar brizonidi, da lavarout eo tro-dro da 40.000 den, e oa an dazaters. Aes kenañ eo selaou an dazaters-se war ar genroued, ha kentelius kenañ eo. Displegañ a ra penaos e c'hell ur muslimad *lambda* dont da vezañ, er prizon, un islamour glan ha kalet, e-kerzh teir sizhun, ha penaos lezennoù evel hini Taubira a vez arveret evit ar moederezh⁸ muslimat, dre zisplegañ d'ar brizonidi all, tebet bezañ kristen, n'eo ket er broioù muslimat e vefe graet lezennoù evel-se, a vrein ar gevredigezh, a vrein an tiegezhioù. Displegañ a ra an Tad Viot n'eus ket, evit ur muslimad, un diforc'h etre un dizouead, ul laikour, hag ur c'hristen gwirion, holl ez int er c'hamp kristen, ha neuze al lezenn Taubira a zo ul lezenn gristen evitañ, hag ar relijion gristen a aotre an dra-se, a zo ur relijion brein a-grenn, keñveriet gant an Islam. Reiñ a ra e soñj a-zivout ar gengomz etre Kristenion ha Muslimiz ha na servij da netra, rak ne vez ket graet an atersoù mat ouzh Muslimiz en abeg d'ar *politically correct*. Terriñ a ra an haeradenn-mañ e vefe kredet en hevelep Doue gant ar Gristenion ha Muslimiz, hag e reizh an traoù o lavarout e kred pep hini en un Doue unel, ar pezh n'eo ket heñvel, hag e resisa e oa bet difaziet an dra-se gant ar Pab Paol VI da geñver e C'hourbannadenn-Feiz vras e miz Mezheven 1968. Ne hañval ket Paol VI bezañ bet selaouet, rak un heuliad kendaeloù ez eus bet hevlene en eskobiezh Naoned, ma oa dres an talbenn : "Un hevelep Doue evit teir relijion". Skrivet em eus d'an atebeion a aoze ar c'hendael-se em farrez evit enebañ ouzh hevelep gevier, met n'em eus bet respont ebet.

Emgorerezh pe emzifenn

Emañ em envor ar skeudenn-mañ eus ur bugel bihan ma roer dezhañ un aval kaer : laouen eo ! Bez' e roer dezhañ un aval kaer all : laouenoc'h eo c'hoazh ! Bez' e roer dezhañ un trede aval : laouen eo bepred, hogen n'en deus nemet daou zornig hag e kouezh an trede aval war al leur.

⁷ Askounañ : *rappeler, remettre en mémoire*.

⁸ Moederezh : *propagande*.

Klask a ra dastum an aval kouezhet, met e-keit-se e kouezh unan eus an daou gentañ. Kenderc'hel a ra ar bugel da glask dastum e dri aval hogen bewech e kouezh unan, neuze gant an dic'hallus ma-z eo dezhañ dont a-benn en em laka da ouelañ. Kentel an istor : Pa-z omp re binvidik n'eo ket gwelloc'h eget bezañ paour.

Emañ ar saviad-mañ, tamm-pe-damm, hini Breizh : bez' hon eus div gêr vras, Roazhon ha Naoned, neuze ez omp pinvidik, ac'hanta nann, siwazh, rak evit hor gwalleur ez eo. Pep hini eus an div gêr-mañ, d'an nebeutañ ar re a zo en o fenn, a labour evito o-unan ha tamm ebet evit lazioù Breizh a-bezh. Nathalie Appere, maerez Roazhon, evel Johanna Rolland, maerez Naoned a zo a-enep adunvanidigezh Breizh, o div ez int ezel eus ar PS gall, hag e sentont outañ divorc'hed. A-du emaint gant un unvanidigezh sevenadurel a zo beziat seulabred, hogen tamm ebet evit unan bolitikel.

Aterset gant ur c'helaouenner (L'Express, 8 Here 2014) a c'houlenn outi : *“Perak maerez Roazhon a zo ac'hanoc'h, a zo a-enep da adunvanidigezh Breizh ?”* e respont Nathalie Appere oc'h arverañ arguzeg ar *“politically correct”* : *“Dre ma 'z eo un diarc'hadur⁹ en em harp war un dostidigezh sevenadurel hag hennadelezh¹⁰ am laka diaez. Ne gredan ket ez eo ret diazezañ un adaoz amaezhiadurel war veziadoù¹¹ istorel. Rak pelec'h e vo ar vevenn da heul ? Pa welan pezh a dremen e Bro-Skos, e Flandrez pe e Katalounia, ez on nec'het. Difenn an hennadelezh a vrok da vleinañ d'an emgorerezh¹².*

Arveret eo bet alies arguzenn an emgorerezh evit enebañ ouzh an emsaverion, ha meur a hini evit en em dennañ eus an toull-trap-se, a zifraee kerkerent da ziogetañ edont a-du gant ur Vreizh digor bras he dorioù d'an holl. Morvan Lebesque (Doue d'e bardono), bet kelaouenner e *“Le Canard enchaîné”*, a ranke bezañ bet taolet ouzh e zremm ar rebech-se ur wech bennak, rak en e levr brudet *“Comment peut-on être breton ?”* embannet evit ar wech kentañ e 1970 (e ti Seuil) e skrive e vefe mat memestra en ur Vreizh emren kaout kalz Yuzevion, kalz Arabiz, kalz Morianed... Un arguzenn vedelour ez eo an emgorerezh, taolet ouzh dremm ar re a fell dezho difenn o lazioù. Ar gellidourion

⁹ Diarc'hadur : *revendication*.

¹⁰ Hennadelezh : *identitaire*.

¹¹ Beziadoù : *des faits*.

¹² Emgorerezh, emgoradur : *repli sur soi, se refermer sur soi*.

etrevroadel ha renerion an embregerezhioù bras etrevroadel ne blij ket dezho an harzoù, plijout a ra dezho dreist pep tra ur bed a vefe divevenn, evit gellout korvoiñ gwelloc'h ar pobloù o tilec'hiañ kevalaoù ha greantioù e-lec'h ma vo ar gwellañ buzad¹³, neuze, stourm evit ur Vreizh adunvanet n'eo ket un emgorerezh, hogen suroc'h un emzifenn : bezañ kreñvoc'h evit chom hep bezañ kaset da get, dre zivizout, bevañ ha labourat en hor bro.

Met, pa soñjer mat, ez eo an emgorerezh ur rebech-boomerang, hag evit pezh a sell ouzh maerez Roazhon, ez eo kentoc'h hi a ra emgorerezh : nac'hañ a ra kemer ur saviad evit mad Breizh a-bezh, soñjal a ra hepken evit he c'hêr, heñveldra evit maerez Naoned. Prederiet ez int a-dra-sur gant an dalc'h da c'houzout da biv e vefe kêrbenn Breizh adunvanet, hag en implijoù kollet evit an hini na vefe ket dibabet. O chom evel ma plij da Bariz - a zo atav o fatrom skouer - ha d'ar gouarnamant sokialour, e vir Roazhon kêrbenn Breizh vac'hagnet, ha Naoned kêrbenn ur rannvro lieselfenn ha diene, met ar pouezusañ evit lod eo bezañ kêrbenn un dra bennak.

Komzoù iskis distaget gant Winston Churchill

Peogwir ez omp c'hoazh e 2014, bloaz kounlid kantvet bloaziad distignidigezh ar brezel-bed kentañ, e kavan mat menegiñ un diskleriadenn eus Winston Churchill tennet eus al levrig-flemmskrid *“The Hidden Tyranny”* (Ar mac'homerezh kuzhet) gant Benjamin Freedman, 1961, p. 16 ar PDF a gaver war ar genroued :

“Un deiz, oc'h ober dave d'an diskleriadur-brezel amerikat a-enep da Alamagn, e tisklerias Winston Churchill en un dazaters gant ar gelaouenn vrudet Scribner's Commentator eus 1936¹⁴ : “Ne gomprenin biken perak Wilson hol lakaas en un hevelep lagenn e 1917”. E-kerzh an dazaters e tisklerias : “N'he dije ranket biskoazh Amerika emellout er brezel-bed kentañ. Hep emelladenn Amerika, e oa rediet an holl re Gevredet da zegemer kinnigoù peoc'h Alamagn adalek an nevezamzer 1917. D'ar mare dik-se en dije harzet ar peoc'h freuzadur Rusia ha donedigezh ar gomunouriezh war e lerc'h,

¹³ Buzad : *profit*.

¹⁴ Aze e rank bezañ ur fazi bloaziad ; war ar genroued e kaver un notenn ne voe embannet ar *Scribner's Commentator* nemet adalek 1939, neuze lenn kentoc'h ar bloaziad-se.

kouezhadenn Italia hag ar faskouriezh war e lerc'h, hag ar feur-emglev mezhekaus sinet gant Alamagn, o tevoudañ an naziouriezh. Mar bije chomet Amerika pell diouzh ar brezel, ne vije ket anadet an holl "ouriezhoù"-se ("ismoù") en Europa o tiskar ar gouarnamantoù parlamantel diouzh un tu, ha kement-se en dije espernet buhez lies milionoù a Vreizhveuriz, Gallaoued hag Amerikaned".

Hag ouzhpenn-se a skriv Benjamin Freedman : "Kinnig peoc'h alaman ne zarvenne"¹⁵ na digoll

¹⁵ Darvennout : *exiger*.

na dic'haouadur ebet. Alamagn a rae gouestl da zistreiñ d'ar broioù kevredet gant Breizh-Veur o stad tiriadel hag o dizalc'hiezh politikel evel ma oant a-raok ar brezel 1914. Dalc'homp mat ar beziad-mañ : Alamagn ne c'houlenne dic'haouadur ebet.

A-dra-sur e vije bet hepkoret un toullad gwalleurioù da Europiz mar bije bet asantet d'ar c'hinnig peoc'h-se e derou 1917.

Yann MIKAEL

Kêrvrezhon : un arnod da sevel ur gêriadenn vrezhonek 1/2

Daou diegezh a zo o paouez sevel ul lec'hienn war ar genrouedad¹⁶ da ziskleriañ o c'hoant da sevel ur gêriadenn hollvrezhonek a-gevret, ha gant tiegezhioù all ma vezont kavet. Sirius eo o emzalc'h. Emaint e kreiz o brud, o kregiñ da gaout bugale, frankiz a-walc'h ganto da zibab c'hoazh penaos e renint o buhez da zont, ha pergent pelec'h emaint o vont da vevañ.

Piv n'en deus ket soñjet – pe hunvreet – biskoazh mont da chom en ur gêr hollvrezhonek, paneve nemet ur barrezig a netra, pe zoken ur gêriadenn ? Ur soñjezon evel-se n'eus ket reishoc'h pa seller ouzh petra eo ur yezh ha pa asanter sellout ez-leal ouzh stad ar yezh.

Petra eo ur yezh ? Ur benveg daremprediñ ez eo, da gentañ-penn, hogen ur benveg mat ha n'eo ket merglet pe diazas e rank bezañ¹⁷. Ha penaos ez eo stad ar yezh ganimp e Breizh hiziv ? Fall-du. N'eus mui den unyezhek ebet. Ne vez mui savet bugale e brezhoneg, war-bouez un nebeut kantadoù anezho marteze, ha c'hoazh n'eo ket sur, pa-z eo trec'h ar galleg ennomp-holl gwitibunan en abeg da live izel ar brezhoneg¹⁸ :

¹⁶ Klask "Kervrezhon" war ar genrouedad.

¹⁷ Diwar Yod-kerch en doa adembannet Youenn Olier ur pennad gant Ivon Gag (Paotr Skrigneg) e niv. 40 Imbourc'h 1973 : «Me 'm eus c'hoant un toull» e-lec'h e verke mat an aozer an doug o doa e geneiled da zistreiñ war ar maez da gavout brezhoneg "dumañ", "diwar ar maez", da vont en un toull, p'o defe ranket er c'hontrol deskiñ brezhoneg ar c'hêrioù, hini Gwalarn ha zoken hini Imbourc'h, en ur ger hini an dazont, unan gouest da dalañ ouzh ar vuhez a vremañ. Aze en em gaver gant dislavar pennañ ar rummad-se : ur vuhezegezh diroll hag er c'hontrol ur spered mirelour ha kilstourm diskiant war boent ar brezhoneg, ur brezhoneg is-diorreet. Ha war-un-dro o deus dilezet ar vroadelouriezh evit ar gleizelouriezh, pezh a laka hor yezh vroadel da vezañ diezhomm pa brederier un tammig bihan.

¹⁸ Gwellaat hor brezhoneg a dalvez asantiñ mont d'ar skol en un doare bennak : lenn kalz da skouer, implij servijoù Ofis ar brezhoneg. Sed amañ skouerioù kinniget gant Ofis ar Brezhoneg

n'omp ket gouest bep tro da zispakañ en hor yezh traoù 'zo eus ar vuhez arnevez : galleg a zeu ganimp, ha saozneg alies ivez (war dachenn ar c'halvezerezhioù niverek da skouer). N'eo ket souezh : holl ez omp beuzet en ur bed gallek pa-z eomp er-maez eus ar gêr, ha zoken er gêr, ma ne vez ket lakaet boazioù strizh, ez eo diaes talañ ouzh ensiladur ar galleg e diabarzh an ti zoken, gant ar skingomz, ar skinwel hag ar genrouedad n'en deus enno ar brezhoneg nemet lodenn ar paour !

Ha pa vez anv a vegañ buhez hor spered eo ret mat anzav ivez ne gavomp ket kalz a dra a dalvoudegezh en hor yezh evit ar vuhez a vremañ, e-keñver levrioù zoken, daoust d'ar strivoù bras a vez graet da embann oberennoù uhel en hor yezh¹⁹. Henn anzav a ranker : betek-henn ned eo an Emsav nemet ur bed "paper" dreist-holl, a vev dre ar c'helaouennoù hag al levrioù brezhonek. N'eus kevredigezh vrezhonek ebet ken, e lec'h ebet. N'eus nemet hiniennoù a zalc'h penn en o c'horn hag a glask sevel frammoù bras pe brasoc'h da c'hortoz-hep henn anzav outo o-unan avat !- ur seurt burzhud bras a rofe an dro da grouiñ a-benn ar fin ur gevredigezh vrezhonek en hor bro.

Ha c'hoazh, diwar-benn hor bed e paper eo ret-mat merkañ n'eus er mare-mañ skrivagner ebet a dalvoudegezh vras d'am soñj, ha n'eo ket souezh p'emaomp gant ur yezh war var da

: GPA : Doug evit an hentez, PMA : hiliadur skoazellet entmezegel (HSM) ; EPHAD annez herberc'hiañ evit an dud oadet dalc'het (AHDOD) ; Gay : Gae (kinniget hor boa Kogez a zo er yezh evit 'eféminé') ; Lesbienne : Lesbiane (a ziskouez ur wrizienn c'hallek evel "korintian", "efezian". Kinniget hor boa Lesbiadez(ed)).

¹⁹ Met nebeutoc'h a lennerion a vez eget dek vloaz 'zo, lakaomp.

vervel, nebeut a dud ganti gouest da sevel enni oberennoù talvoudus. Hag e-touez ar re a zo aet da Anaon n'eus ken 'met Youenn Olier dreist-holl, d'am soñj adarre, en doa un dra bennak da skrivañ, ur preder dezhañ e-unan, da heul ur vuhez hir a breder war an Emsav, ar yezh, ar feiz, emdroadur ar gevredigezh, al levrioù niverus a vurutellas, e zarempredoù gant emsavioù all ar broioù keltiek hag all. Hag evit petra skrivañ e brezhoneg ? Petra a c'hell hor broudañ ? Evit respont d'ar goulenn pennañ da vihanañ diwar-benn ar yezh : perak derc'hel gant ar yezh ? Se a zo kreizik-kreiz oberenn Youenn Olier, hag ivez hini an darn vras eus skrivagnerion ar brezhoneg a-raok rummad 1968. Gant e ziv levrenn "*Skol Walarn*" e verk mat Youenn Olier an darempred strizh a gaver etre o oberennoù hag o buhezioù, ha bep tro n'eo ket dister kraf dazont ar yezh. Skrivañ evit ur bobl vrezhonegerez ha n'eus ket anezhi a bell 'zo ? Skrivañ evit ur bobl kristen ha n'eus ket mui anezhi kennebeut a-bell 'zo ? N'eus ken 'met gwir vroadelourion a c'hell derc'hel da skrivañ en ur yezh dilezet gant an holl, ha gwashoc'h c'hoazh : kenderc'hel d'ober ganti o sevel kumuniezhioù. Pe neuze e reer dre lorc'hentez, evel ur stultenn, pe c'hoazh dre genedouriezh c'houllo skoaziadet gant frammoù gall evit kuzhat o c'hiriegezh vezhus e stad vantrus hor yezh, lakaat an dud da gousket eta, oc'h embann levrioù skoaziadet na gavint ket gwerzh bras, forzh penaos. Skoaziadoù da lakaat an emsaverion da devel ha da c'hoari ur seurt "c'hoari-roll" en ur "bed e-giz pa vije", a lavarfe Françoise Morvan... Ne lâran ket ez eo didalvoud embann levrioù hogen n'eo ket pal an Emsav hag e c'hell bezañ touellus.

Taolioù esae a gumuniezhioù brezhonek

Mont a ran da daolenniñ amañ da heul an nebeut taolioù esae da sevel kumuniezhioù brezhonek bev a zo bet abaoe ar brezel.

Sonjal a ra din e ranker kregiñ gant ar c'hamp brezhonek a oa bet aozet gant Kemperiz e Foen ("**Skol Sant Iltud**") e dibenn ar brezel e miz Gouere 1943 (An Itron Kemere, an Itron de Bellaing, Yann ar Beg, Youenn Olier...). Meneg a gaver eus ar c'hamp-se e dezlevr Youenn Olier. Ur plac'h a benn e oa an Itron Kemere. Hec'h anavezet em eus un nebeudig e dibenn he buhez. Straed Astor e oa o chom hag e oa o paouez treuzkas he levr di, straed ar Roue Gradlon da wGweltaz ar Fur, a savas eno e stal "Ar Bed Keltiek", a voe e-pad pell ul lec'h emgav evit brezhonegerion emskiantek Bro-Gemper.

Goude ar brezel e voe savet kampoù all war skouer hini "**Skol Sant Iltud**" Foen : KEAV "**Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerion**", gant Langleiz da gadoriad, hag a bad c'hoazh, digristenaet avat adalek 1975. Kalz a izili eus EAT o deus kemeret perzh e KEAV, pa oa Paol Kalvez ar merour anezhañ betek 1974²⁰. Dispar e oa ar C'hamp-se dre ma oa ar prantad amzer nemetañ ma oa ar brezhoneg ar yezh aotreet nemeti. Bep bloaz en em gave evel-se "begenn an Emsav" : eno e oa tu da gejañ gant an dud ha da sevel raktresoù evit ar stourm. Evel-se e oa ganet, evit un darn da vihanañ, SADED (Skol an Deskadurezh Eil Derez), ar skol dre lizher a live gant ar skolaj (gant Paol Kalvez, adarre, da sekretour), ha goude-se Skol An Emsav... ha Diwan eveljust.

Goude ar brezel e oa bet ivez egin ur gumuniezh hollvrezhonek a voe frouezhus-dreist : "**Kêr Anna**" e Yerres e bro-Bariz e traoñ liorz an tiegezh Gelleg ma oa ar mab sekretour Roparz Hemon ma 'm eus soñj mat. Eno e vevas an tiegezh Louarn "*bloavezhioù laouen-tre*" a gouna Lena Louarn, hogen dibourvez a-walc'h e oa an tiegezh harluet da heul ar brezel. Eno eo e voe krouet Emglev An Tiegezhioù, gant an tiegezhioù Louarn ha Kerlann. Bez e oa en-dro da Gêr Anna, an tiegezhioù Kaouissin (Brittia films), Keraod (skaouted Bleimor ha neuze skoated Europa), Cochevelou (Stivell) hag re all c'hoazh...

Er bloavezhioù '60 e voe ganet **ur wir gumuniezh vrezhonek e Roazhon** en-dro d'an Oferenn vrezhonek. Miziek e oa da gentañ ha neuze e voe bep sul e chapel skolaj Sant Marzhin. An Aotrou beleg Kalvar a oa Eudist (dalc'het eo c'hoazh ar skolaj gant an Eudisted) ha kelenner war ar fizik, a zigore e sal klas Fizik-kimiezh evit ma c'hellfe an dud chom ur pennad war-lerc'h an Oferenn. Alan Louarn a rae e vad eus ar prantad-se en-dro d'ur banne kafe evit ober bruderezh war-dro ar brezhoneg gant paperoù a bep seurt hag a bep ment, evel ma oa boas ober abaoe keit all (dija e-pad ar brezel e oa brudet evit se !). Evit gwir, ma oa en he barr ar gumuniezh-se en-dro d'an Oferenn e Sant Marzhin, e oa krog kalz a-raok, ha dreist-holl gant donedigezh ar re Louarn **30 Leurgêr al Lisou** e Roazhon, en ul lojeiz feurmet dezho gant ar Gontez Beatris a Rohan-Chabot, a save he bugale e brezhoneg. E-kichenik war al leurgêr edo o chom Anna Youenou, intañvez Frañsez Debauvais, rener Strollad Broadel Breizh²¹. Al lec'h-se, leurgêr

²⁰ E Pont-e-Kroaz eo e oa bet tizhet e 1974 an niver uhelañ a berzhidi, war-dro 200, ur sifr n'eo ket bet tizhet biskoazh abaoe. Er rummad yaouank deuet diwar darvoudoù '68 e oa lod na zoujent ket ouzh tud ar rummad a-raok a oa kentoc'h broadelour-kristen ha war un hentenn begennelour, tra m'edo ar rummad o tont kleizelour dizoue alies-mat, ha pobllelour. Ur wech o doa kinniget un arched da bPaol Kalvez, er sal vras da ober goap outañ ha d'ober dezhañ dilezel e garg e servij KEAV e-pad bloavezhioù niverus. Pezh a reas.

²¹ Hec'h anavezet em eus un tammig : brezhonegerez vat e oa, eus Douarnenez, a veve paour-tre en un gambr a servije dezhi

al Lisoù, gant levr di Straed Penc'hoed nepell, a voe e-pad pell ul lec'h emgav evit an emsaverion e Roazhon : an tiegezh a chome er solieradur hag Alan Louarn en doa e vurev, ec'hon a-walc'h, rez an douar. Dre ma oa breur-kaer da Youenn Olier ha ma oa niverus c'hoazh ar vugale en tiegezhioù d'ar poent hont (Olier : seizh ha pevar bugel-bihan advabet diwezhatoc'h, Louarn : 7 pe 8, Bouessel du bourg ha Souffez-Despré : memes niver well-vazh. Gant un nebeut tiegezhioù ne oa ket diaes bras ober bodadegoù a zoare netra nemet diwar niver an dud o kemer perzh ! Bez e oa ivez tiegezh Paol Kalvez, Gorvan, Chérel, Pêr Roy, Bourc'hiz (evit ar sonerezh), ha tud all c'hoazh am eus kollet ar soñj anezho.

Pa-z eas Youenn Souffez da Vrest e reas dres ar memestra o sevel ur framm kristen straed Berthelot, ur stalig mezherezh dilezet, gant ur witrin evit ar bruderezh : **Oaled Sant Erwan**, ha dizale un oferenn bep an amzer e kript iliz Sant Marzhin Brest gant an Aotrou beleg Maoris ar C'hollo. Gwall-ziwzhat (er bloavezhioù 80) e tizhjomp kaout un oferenn bep sul e chapel sant Paol, un eurvezh a-raok an Oferenn e latin, damdost eus ti Souffez-Despré a oa o chom e kroaz-hent straed chapel sant Paol hag ar straed Richelieu.

Ret eo menegiñ ivez taol arnod tiegezh Paol Kalvez hag hini Malo Louarn a savas pep a di en un "toul kollet" e koadeg brasañ Breizh, **Les Hinogues**, 12 kilometrad diouzh bourk Pempont. Paol a savas an ti e-unan bep un tammig war un dachenn prenet a-drugarez da Langleiz evel kred, met tiegezh Malo ne zeuas biskoazh da chom enno daoust m'o doa lakaet sevel un ti ivez : e Argol en em staljont a-benn ar fin. Ur pezh c'hwitadenn eta... hogen, un taol-arnod evelkent, a zo test eus c'hoant un nebeut brezhonegerion da sevel ur seurt kiboutz e brezhoneg gant an nebeut a frankiz o devoa. Enor dezho !

Tu 'zo da gomz ivez diwar-benn degouezhioù all, evel arnod **Gwenole ar Menn hag Erwan Evenou** e bro-Gemperle, war ar maez, un ti a vefe evel un eor da zerc'hel bev ar yezh eno, pe c'hoazh hini Maner **Menez-Kamm Spezed** bet legadet dre un "eured-wenn" gant an dimezell a Sant Pêr hag a voe adperc'hennet gant he familh (ar Senadour-maer de Menou eus Plouvorn..) siwazh. Pêr Denez ha Pêr Manac'h/Le Moine (eus Tregornan-Groñvel) eo a reas kalzik war-dro gant ar soñj da sevel ur greizenn a-bouez evit an Emsav.

Skol an Itron-Varia e Treglonou a voe prenet gant Diwan er bloavezh 1983 a gav din, dre hanterouriezh un "SCI", "**SCI Oaled Diwan**" gant ur c'hevala argemmus hep an disterañ gwenneg da zegas er penn-kentañ. Un dek den bennak a lakaas o anv da

ivez da gambr-livañ evit dastum arc'hant da vevañ ha da voullañ c'hwec'h levrenn he zesteni diwar-benn he gwaz.

vezañ kred evit an amprest a voe sammet gant an SCI da brenañ ar skol (war-dro 480 000 lur) ha bep trimiziad e veze kresket ar c'hevala gant al lodennoù eus an SCI nevez-prenet gant an emsaverion hag ar skolioù Diwan lec'hel. Un afer vat-tre e voe. Siwazh n'eo ket prest Diwan da adober seurt embregadenn (prenañ mogerioù he skolioù kentoc'h eget paeañ feurmoù da virviken...) dre ma klask kaout skoaziadoù da baeañ ar feurmioù. D'am soñj ez eus tu d'ober an daou ma vez meret "mogerioù" ar skolioù evel ma ra ar skolioù "libr" all... Ar skoaziadoù ne badint ket marteze da viken.

Degouezh Becherel 'zo ivez. Er penn-kentañ e oa ur mennad da sevel ur gumuniezh vrezhonek ha bremañ ez eo difoupet war "**Kêrbenn al levrديوù e Breizh**". Prenet o deus pep a levr di e kêr Vecherel. Lod a zo chomet tomm ouzh ar yezh.

E 1984 e oa bet diazezet kumuniezh "**Minihi Levenez**" e Trelevenez gant ar beleg Job an Irien, Daniela, Kristian Brisson, e wreg Marcelle hag e vamm-gaer. Padout a ra c'hoazh an ensavadur daoust ma n'eus mui nemet ar beleg er presbital kozh. Izili zo a zo o chom er barrez, ur barrez vihan-tre (290 annezad), enni daou diegezh brezhonek tri a vugale e pep hini oc'h ober gant ar yezh, va hini en o zouez. Unan zo er c'huzul-kêr, skolaerez e Diwan. Met n'eus tost darempred ebet etrezomp. An Oferenn e brezhoneg a vez d'ar merc'her ha dreist-holl d'ar sadorn. Siwazh eo galleg dreist-holl a glever war-lerc'h an Oferenn, ha n'eo ket rener Minihi Levenez a vije da damall ma klaskfed ar perag : an dud a gompren ar yezh hogen n'emaint ket evit ober strivoù evit ober anezhi yezh o spered. N'int ket stourmerion. O bugale, daoust m'o deus desket madik ar yezh er skol, a ra evel o zud. Ar brezhoneg a zo evito yezh an Oferenn ha yezh ar skol ha setu holl.

E dibenn 1986 e voe kroget gant **Tiegezh Santez Anna** (ur gumuniezh katolik ha brezhonek) e Maner ar Palud-bras er Forest-Landerne ; e 1993 e voe prenet un domani evit e lojañ e Kistinid a-drugarez da "Breuriezh Sant Iltud", hag e 2001 en em stalias e **Roudoualleg**, pell diouzh ar bourk. Eno emañ bepred ar gumuniezh vihan-se, tri ezel oc'h ober anezhi, en-dro dezhi mignoned kalz niverusoc'h evelkent.

Diwar an holl skouerioù se, hini Yerres ha Roazhon a seblant din ar re dalvoudusañ, rak da vihanañ ez adkaver meur a Louarn en Emsav war-lerc'h tremenvan Alan Louarn. Hag e kêr edont, tro o doa da gejañ gant kalz a dud. Dre-se e oa tu da skoulmañ darempredoù a dalvoudegezh da gas embregadennoù pe d'o skoazellañ : ar gelaouenn Emsav, Skol an Emsav, Imbourc'h, Emglev An Tiegezhioù, Brudañ ha skignañ, ar stourm evit an Aotreegezh hag ar C'hapes, SAB, hag all hag all. Sur a-walc'h ivez, er pleustr, ez eo bet penndalc'hel al liamm start a

diegezh etre Youenn Olier²² hag Alan Louarn. War ar poent-se ez eo ret-mat merkañ n'en doa ket

²² E Roazhon an hini eo e taolas e sac'h, met dre zegouezh a-benn ar fin, rak e-pad pell amzer – an dra-mañ a verzer netra nemet o lenn talbennoù an ugent levrenn bennak eus e vuhez bet embannet gantañ – ne gave plas labour stabil ebet en Deskadurezh, dre ma oa war al “listenn ruz” goude ar brezel, o vezañ m'en doa saveteet ar ZH ha savet ur strollad emrener nevez ken abred ha 1945, gant skriverez e letanant hag harpet gant e geneiled bet enluet a-gevret gantañ Youenn Kraff ha dreist-holl Marsel Blanchard, bet person Kistinid betek daou vloaz 'zo, a gemeras perzh bras e bodadegoù Breuriez Kristenion Breizh a awenas ar gelaouenn Imbourc'h adalek 1974 hag e-pad tregont vloaz. Laouen e oa avat da vezañ o chom e Roazhon, anat eo pa weler en e zeizlevr ar c'hejadennoù niverus

Youenn Olier dibabet mont da chom en un “toull kollet”. *Da vezañ kendalc'het...*

Tepod Gwilhmod

a reas, en e di, 30 leurgêr al lisoù, er c'helc'h breizhek, Kentelioù-noz niverus Skol an emsav, ur framm lusket gantañ ha Paol Kalvez betek troc'h 1974, ha me 'oar-me. Sur a-walc'h ne vefe ket bet heñvel ar gont ma vije bet o chom en un “toull kollet” dizarempred evel Gouezeg da skouer, e-lec'h edo mab Yeun ar Gow o chom hag o sevel e vugale e brezhoneg en ur gevredigezh plouezat breizhek-kristen o kouezhañ mik en he foull, hep framm ebet na darempredoù evit kas da benn un oberenn bennak....

€ sigur Oberenn Kant

E 1762 e skrive Kant : "Didalvesoc'h eget ar re a labour gant o daouarn en em gavfen, keneve d'am c'hredenn e c'hall ma frederouriezh degas talvoudegezh d'am holl oberioù all, ha sikour gant peursavelañ haolioù an denelezh."

Anezhañ un den gorrek e breder, da eizh vloaz ha tregont e kejas gant ar pezh a oa da zont da vezañ pal meur holl dibenn e vuhez : "peursavelañ haolioù an denelezh", distrujañ aotrouniezh an hengoun hag ar boazamantoù, krouiñ ur gevredigezh kempoellek renet gant ur Stad kempoellek a zesav hag a ra deskadurezh kempoellek da dud kempoellek, tud renet gant reolennoù peurunvan, e-lec'h bezañ renet gant bondougoù evel loened pe renet gant beleion evel kouerion ar Grennamzer.

Kement tra graet gantañ abaoe an diskleriadenn-se a oa evit tizhout ar pal-se ; zoken e gurioù prederouriezhel vrudetañ n'oant nemet binviji evitañ. Krediñ a rae e oa tonket emdroadur an denelezh da dostaat dalc'hmat ouzh ar pal-se, en un doare kamm ha gorrek marteze, dibaouez ha dieiltro avat. Pa anzav Kant e c'hellfe marteze an dud c'hwitañ war tizhout ar pal-se, e lavar sklaer n'eus pal ebet all da glask : *tertio non datur* etre ar gevredigezh kempoell kante hag ar varbariezh.

Oberenn brederouriezhel Kant, en hollad koulz hag er munudoù, a striv dalc'hmat hag hep skuizhañ davet an hevelep pal a dizh an holl gevredigezh, an holl sevenadur, an holl bolitikerezh, an holl divez, an holl gravez, an holl deskadurezh, an holl haol, an holl darempredoù-familh, an holl vuhez.

Kant ne voe ket tamm ebet ur prederour digenvez ha neptu, o plediñ gant traoù difetis na sachont evezh nemet un niver dister a arbennigourion. Ur c'hrouer-bed-nevez eo bet, koulz ha Platon, Luther pe Karl Marks. Se a felle dezhañ bezañ ha deut eo a-benn. Tra ebet skrivet pe kelennet gantañ ne c'hall bezañ komprenet er-maez eus ar raktres meur-se - pe ar raktres divuzul-se ma kavit gwelloc'h.

Tri zra a c'hall kuzhat pe peurguzhat zoken ar wirionezenn-se :

1. Peurliesañ e vez implijet gant Kant ur c'heriaoueg ken divoutin hag ul langach ken iskis, ken e seblant bezañ muioc'h e chal gant bevennañ niver e lennerion eget gant levezonañ ur bern tud.

2. Tammoù 'zo eus e brederouriezh a bled gant kudennoù ken diaes hag a zo diorroet ken kaer ha ken fonnus, ken e vezer techet da vezañ anezho evel oberennoù-meur drezo o-unan, ha techet e vezer da ankounac'haat ar pal servijet gant an holl oberennoù-se.

3. En abeg da se end-eeun, kalz studierion war oberenn Kant (re barrek-tre en o zouez), a vez techet da gemer an oberennoù-meur-se evel kreizennoù-kenurzhañ an hollad, ha meizañ ar peurrest evel mennozhioùigoù dibouez pe zoken sorbiennoù istorel-buhezskridel hepmuiken.

Daoust d'an tri foent-se, Kant ne baouezas morse a addiskleriañ e bal meur, betek en e gozhni ziwezhañ zoken. Labour ebet war oberenn ur prederour ne zlefe ankounac'haat an doare ma veze komprenet ar brederouriezh gant an oberour e-unan.

Gwir eo ne vez meneget ar pal-se nemet e skridoù nebeutoc'h anavezet, ket er "pennoberennoù" evel Burutell ar Poell Digenvez, Burutell ar Poell er Pleustr, ha Burutell ar Barnerezh. Padal e kendalc'he Kant da soñjal er pal meur-se ha da gaozeal diwar e benn pell war-lerc'h embannidigezh ar re-se. An dra-se a ziskouez n'en doa biskoazh disoñjet Kant e vennadoù kentañ, n'en doa biskoazh en em lezet da vezañ dihentet gant taolioù chañs dic'hortoz 'zo.

Ma studias pell ha ma skrivas levrioù hir-tre war boentoù resis-tre 'zo, n'oa ket peogwir en doa kemmet e vennad, met peogwir en doa komprenet ne c'halle kas anezhañ da benn nemet pa vefe diskoulmet ar c'hudennoù-se a-raok.

Mennet ma oa da lakaat tonkadur mab-den e sujidigezh ar Poell, Kant n'en deus studiet pizh-pizh

harzoù ha gwanderioù ar Poell nemet peogwir ez eus anezhañ ur c'hadour sirius, a ensell pizh-pizh ouzh e armoù kent mont d'an emgann. Pa vihana domani ar Poell e-lec'h astenn anezhañ divuzul evel ma ra kalz re all, ez eo evel ur jeneral o tolpañ e luoz kuit da forc'hellañ anezho - rik ar pezh a oa bet desket ober gant Napoleon Buonaparte, kempred dezhañ.

Kant a zo bet marteze ar c'hrouer-bedoù soutilañ hag ar muiañ a ijin dezhañ a vefe bet biskoazh. Dre chom hep mont d'ar bobl, ha chom e bed ar gefredourion rik, en deus hepkoret an holl enebiezh hag an holl zivrud izel a spered bet kouezhet hardizh war Marks pe Luther. Miret en deus gantañ ur brud-vat peurc'hlan, evel un doare doue kevrinus a spurmanter eus a-bell.

Dre ginnig e vennozhioù evel kudennoù ha diaesterioù hep fin ebet dezho kentoc'h eget gwirionezioù da vezañ kredet enno, en deus gouezet skignañ e levezon dizanv betek kalz pelloc'h eget kelc'hig dister an heulierion emziskleriet. Tizhet gantañ ar pezh a hunvree Antonio Gramsci evit ar Framm Komunour : “Galloud hollvezant ha diweladus ur gourc'hemenn krak-ha-krenn.”

Olavo de Carvalho

Brezhoneg gant **Ewan Delanoy**. Embannet evit ar wech kentañ e *Diário do Comércio*, dindan an titl *Para compreender Kant*, niverenn ar 16 a viz Here 2014.

Doue ne sell ket a-gorn diwar-c'horre

Parabolenn an daou vab. Mzh 21, 28-32

A-wechoù e c'hellomp kaout ar merzhad da vezañ fichennet, merket da vat, evit ur sottoni, ur fazi yaouankiz, ur momed a drefu, ur pec'hed bennak. Unan bennak en deus graet ur fazi, en em dromplet. Ne baouez ket an dud tro-dro da rebech kement-se dezhañ, da enskrivañ ar fazi-se da viken war vemor an dud, petra bennak a vat a rafe goude se...

Diouzh an tu all, er c'hontrol, ret eo lavarout, an hini a zo bet plaset uhel gant an dud a c'hell ober n'eus forzh petra fall pe faos, en em dromplañ, tromplañ ar re all, hep ma vo displeberet, duet ar skeudenn anezhañ hag e vrud evit mat.

Daou vennozh pennañ a dennin eus ar barabolenn-mañ en Aviel.

1. Touellus eo an neuzioù diavaez.

Ar barabolenn-mañ a zo lec'hiet mat en Istor. Enni e welomp daou vab ken disheñvel an eil diouzh egile en o soñj diwar-benn ar sentidigezh. Jezuz a ra amañ un deskriadur eus ar pezh a dremene er mare m'edo-eñ o prezeg an Aviel.

Ar “grederion vat”, ar “feizidi” féal da lezenn Voizez a denne gloar ha lorc'h eus o reizhder, sur ma oant da vezañ peurvrat dre ma taolent evezh bras da seveniñ holl c'hourc'hemenoù al lezenn betek ar munodoù disterañ. Koulskoude a-dreñv rideoz, andorenn ar beurvadelezh pervezh, pizh-se, en em guzhe a-wechoù un difealded c'hrevus d'ar pep pouezusañ eus Lavar Doue. Sur ma oant eus o ferzhioù-mat relijiel en em serrent d'ar galvadennoù da ganttreiñ, da cheñch buhez,

graet gant Yann Vadezour ha Jezuz. En hevelep mare, damgrederion pe grederion fall, dister, anavezet evit se pe sellet evel-se outoà, evel Zache ar publikan, pe Romaned ken pell diouzh an Doue unan ha gwir, merc'hed a veze kontet evel plac'hed a vuhez fall, ar re-se a zegemere gant levezon kemennadenn ar silvidigezh. Distreiñ a raent ouzh Doue, en em dreiñ war-du Ennañ, cheñch buhez a raent. War a seblant pep tra enno a hañvale bezañ un **nann** d'an Aotrou. Ha setu ma teue o buhez da vezañ ur **ya**, rak krediñ a ment e karantez Doue a zigore dezho hent un dazont nevez. Ober a ment “bolontez an Tad”.

O estrenvan, o reuzeudigezh hag o fec'hed, ur goulidigor en o buhez, a zeue da vezañ ur frailh, un ode, un toull-freiz ma yae drezañ Donezon Doue. Ar re all, leuniet ma oant gant o diarvaroù hag o lorc'h, a oa serr o c'halon da bep donedigezh eus karantez Doue a vefe bet gouest koulskoude d'o zreuzneuziñ

A-benn ar fin, amañ emañ kentel bennañ ar barabolenn-se: un oberer a dalvez kant lavarar. N'eo ket ar c'homzoù a dalv, met an oberoù.

An daou emzalc'h enebet-se, e-keñver galvadennoù Doue a dalvez c'hoazh evit hor bed a-vremañ. Hag ouzhpenn se, aliesoc'h eget daou rummad tud, ar YA hag an NANN eo a vev a-gevret e buhez pep den, evel an dreog hag ar greun mat o kreskiñ e-barzh an heveler park (Mzh, 13, 24-30).

E pep paotr, e pep plac'h, e pep den a Feiz, e kaver, gwir eo, perzhioù denel mat, brokusted, kalon vat, emroadur d'ar re all, d'an nesañ. E-touez kalz a gristenion a-vremañ e weler pegen

feal e felle dezho bezañ d'ar sakramantoù, pegen aketus d'en em stummañ evit anavezout gwelloc'h o Feiz, mont donoch enni, c'hoant bras ganto ivez bevañ don o Feiz hag he zreuzkas d'o brudeur ha d'ar rummadoù yaouank. Met alese e c'hell diwan ivez en un doare soutil ha touellus an diarvar habask da vezañ un den reizh, just, ganto ha warnañ ar vrud hag ar skritell a "gristen mat", pezh a zo un antell, ur poch, un trap, rak kontañ a raer neuze betek re warnañ e-unan.

Se a vefe ankounac'haat an dachenn deñval-se en hor buhezioù, gant argoll, dienez, gwander, gloazusted, ha pec'hed, hag a zo kaoz da gement a nac'hadennoù, a NANN lavaret d'an Aotrou, pe d'an nebeutañ, a YA diwar-c'horre.

Dindan mantell an neuzioù diavaez en em guzh alies kement a nac'hadennoù, a ziouer a garantez evit Doue hag an nesañ, a ziegi, a ziseblanted... War al leurren-se a zisfealdedoù ledan mui pe vui, ne reomp ket "bolontez an Tad". Hag ar riskl a zo evidomp da vezañ dibaset gant ar re a lec'hiomp er-maez eus bevennoù ar Feiz hag ar vuhez kristen, hag a laka e pleustr koulskoude lavar an Aotrou Krist, en ur plas bennak en o buhez !

Na dremenomp ket gant komzoù flour hepken, santimantoù mat, pedennoù gredus. Ur weladenn eeun d'ur chlañvour a dalvez muioc'h eget ur brezegenn gaer war ar c'hleñved ; ur pardon roet ha resevet a dalvez muioc'h eget ur skrid hir war ar peoc'h. Sant Visant a Baol a skrive d'un den, a oa kuzulier speredel dezhañ : "Ho tisentezioù a hañval din bezañ mat, met hañvalout a rafent din bezañ gwelloc'h ma tiskennfent un tamm war an dachenn fetis !"

2. Netra n'eo kollet da viken evit Doue. Ur gemennadenn a esperañs zo roet dimp amañ.

Pobl Israel en harlu e Babilon a rae kalz goulennoù outi hec'h-unan war he stad truezus hag abegoù he reuzeudigezhioù. "Petra hon eus graet da Zoue evit dellezout kement-se?" em c'houlenne an harluidi-se, o soñjal moarvat e oa bet an Aotrou re start en o c'heñver, hag e oant gouzañverion walleürus ar pec'hedoù diniver berniet gant o araokidi. Alese o rebech: "Emzalc'h an Aotrou, e zoare d'ober zo iskis".

Dre c'henoù ar profed Ezekiel e laka Doue an traoù war o reizh: pep hini, pep den a zo kiriek eus e oberoù. Abalamour da se e rafe mat tud

Israel en em c'houlenn, en em atersiñ war o fazioù dezho unan, hag o deus degaset ar gwallreuz-se. Hag-eñ n'o deus ket diheñchet int o-unan, pell diouzh an Aotrou hep bezañ emskiantek eus-se gant ar sur e oant da vezañ ar Bobl Dibabet ?

Nann, ne vez ket peurb'hoariet an traoù, kaset ar c'hoari d'ar penn da vat, evit Doue, netra, gounezet en ur viken evel netra kollet kennebeut evit atav, war live raktres silvidigezh Doue. An den just ne c'hell ket en em gaeañ a-drek e amzer dremenet a zen reizh evit aotren dezhañ e-unan ober a bep seurt droug digastiz. Hag ar pec'her, eñ, n'eo ket kendaonet diremed, rak barnet e vez war e amzeriad a-vremañ a gantroadur a vez dalc'hmat posupl. Evit an Aotrou n'eus ket a donkadur, a blanedenn didorradus!

Ar gemennadenn a esperañs-se a zo ivez hini an Aviel : "Ar bublikaned hag ar serc'hez, ar gisti a vo dirakoc'h er Rouantelezh...", treuzneuziet ma vezont gant ur cheñchamant buhez hag o flas o devo er Rouantelezh.

Hon doare-ober-ni a vez iskis a-wechoù. En ur sellout ouzh ar re all diouzh an diavaez, e tougomp warno barnadennoù na reont nemet ur samm eus o fec'hedoù tremenet. Doue, eñ, hag a zo estren d'hor jedadennoù, ne fell dezhañ derc'hel kont nemet eus ar stad a-vremañ hag eus an dazont o sevel, o tigeriñ tamm-ha-tamm.

"Ne fell ket din e varfe ar pec'her, met e kemmfe buhez hag e vevfe", eme an Aotrou Doue. Divent, diharz eo esperañs Doue evel e youl da salviñ e holl vugale. Evitañ kement den a zo, forzh petra e vefe, a zo barrek, gouest, da gemm, da cheñch buhez, da n'eus forzh peseurt mare. Doue a ra ar c'hred-se dezhañ, ha ne baouez ket da gomz d'e galon evit ma adkavfe hent an eurvad.

An diarvar-se, daoust hag-eñ ne zlefe ket bezañ evel ul loc'h, ur benveg-sevel galloudus, barrek da zilemel ar gwiskad a donkelouriezh o pouezañ war hon choug, ar wiskad a zigalonegezh, a zilezerezh o pouezañ war gein an dud en em varn hag en em gendaon o-unan abalamour d'un amzer dremenet m'en em glozont ennañ ?

Ra vezo an hegaristiezh a lidomp amañ, hag an hini a gemeromp perzh enni bep Sul, ur YA gredus da Zoue, unanet ouzh Ya an Aotrou Krist d'E Dad : YA hor c'hredo, YA hor Feiz, YA hor c'hinnigadenn, Ya hor c'humuniezh, YA hor c'hasadenn da visioniñ, da avielañ. Amen.

Yann Talbot

Chapel Itron Varia an Iskuit, Plouha, d'ar Sul 28 Gwengolo 2014.

Ur burzhud eus ar Rozera

E-kerzh un emgann eus Kroaziadeg an Albiiz, dibunet e-kichen Toloza, ur marc'heg brezhon, anvet Alan, gronnet gant nerzhioù enebour dreist d'e re, a welas dont war e skoazell, ar Werc'hez Vari, a daolas war an Albiiz 150 bir

evit diskouez e oa bet gounezet hec'h emelladenn dre ar 150 Ave Maria eus ar Rozera. *Meneget e-barzh "Chrétien Magazine" niv. 272, Here 2014, p. 6.*

Notennoù diwar an darvoudoù *gant Yann Maneguen*

Finland : Dismantret eo bet ensavadur ar briedelezh gant Finland e miz Du, 105 mouezh a-enep 92. Divizet eo bet ivez gant ar vro-se dilezel kelennerzh ar skrivañ dre zorn evit kelenn ar skrivañ war un urzhiataerez.

Breizh-Veur : an div drederenn eus ar yaouankizoù etre 14 ha 22 a lavar eo bet fall disparti o zud (torr-dimezioù pe dispartioù) evit o studioù. 15 % a rankas kemm skol. Unan diwar eizh a lavar kempouezañ o c'hudennoù gant ar boeson pe drammoù. Unan war dri a c'houzañv gwask o zud evit ma savjent a-du gant unan eus ar priedoù.

Hilastalerezh : hervez ur studiadenn e-touez priedoù er Stadoù-Unanet ez eus kalz nebeutoc'h a "chañsoù" da dorr-dimeziñ gant ar priedoù a implij hepken doareoù naturel da hilastaliñ : etre 2 ha 5 % nemetken. War-dro an hanter eus ar priedoù all a dorr-dimez.

Sioc'hanadurioù : gant 40 deiz-ha-bloaz lezenn Veil e oa bet embannet sifroù heverk a restaolomp amañ : Ar gelaouenn "Le Croix" a embanne e 1974 e oa war-dro 300.000 babig lazhet evel-se bep bloaz ha dre guzh. An INED en deus diskouezet sklaer e oa an niver gwirion etre 50.000 ha 60.000 bep bloaz a-raok 1975. Abaoe e konter war-dro 200.000 bep bloaz. Se zo kement ha lavarout ez eo lezenn Veil penn-kaoz abaoe da 150.000 sioc'hanadur bep bloaz : 6 million a vugale e-korf 40 vloaz. Tost da 40 % eus ar maouezed a sioc'han e-pad o buhez. Kouezhet eo ar feur frouezhadur etre 1973 ha 1976 eus 2,36 da 1,8 bugel dre vaouez (-24 %). Niver ar brazezedoù nann gortozet a zo koazhet eus 46 % da 33 % etre 1975 ha 2004, tra m'eo aet war gresk e-keit-se niver ar sioc'hanadurioù diwar an abeg a vrazzeded nann-gortozet, eus 41 % da 60 % (da lavarout eo tost da 40.000 bugel lazhet bep bloaz dre ma ne oa ket bet rakwelet kaout ur bugel).

Bepred hervez an INED ez eo ar maouezed a zebr ar bilulenn troetoc'h da sioc'hanañ eget ar re all. 72 % eus ar maouezed ez int. Pa vez stabil ar c'houblad e vez sioc'hanet gant asant 78 % eus an tadoù. Pa ne vez ket, ne vez kelaouet nemet 83 % eus an tadoù ha n'eus nemet 56 % anezho a asant d'ar sioc'hanadur (diezhomm eo o asant forzh penaos hervez al lezenn).

Pezh a zo heverk eo ez eo koazhet mik ar c'hoant da gaout bugale. Ret eo e vefe rakwelet ha gortozet, ret eo e klotfe gant raktresoù all ar c'houblad : ar studioù, ar red-vicher, ar vuhez santimantel. Bez' ez eus ivez "Ur waskerezh sokial a vount d'ar sioc'hanañ" hervez Ch. Blayot eus Skol-veur Bourdel. Degouezhet gant an trede bugel e c'hoarvez gant ar gerent klevout o "mignoned" lavarout dezho "paouez gant al labour-noz !" (klevet e brezhoneg gant unan eus ar C'hloastr Sant-Tegoneg)...

E Ouest-France ar 27 Du 2014 e lenner sifroù all c'hoazh : e 2012 e oa ar feur sioc'hanañ (jedet e vez niver ar sioc'hanadurioù evit mil maouez ganto un oad etre 15 ha 49 bloaz) a 14 dre vil. E rannbarzh Breizh e oa 11,2 dre vil da lavarout eo 7197 hag evit ar PDL 13 dre vil (8700 sioc'hanadur). O vezañ ma oa niver ar maouezed e Bro Naoned 36,2 % eus re rannbarzh PDL e c'heller bras-jediñ e vez sioc'hanet eno war-dro 3150 bugel ha war-dro 10300 bugel e Breizh bep bloaz : ouzhpenn 400.000 babig a zo bet sioc'hanet e Breizh abaoe 40 vloaz eta .

Lesbiadezed hag advaberezh : Evel ma oa kaer gortoz, Lez-varn Torridigezh Pariz a zo savet a-du gant an Engehentadur Kalvezadel e degouezh div lesbiadez. Ret e vefe d'ar gannaded mouezhiañ ul lezenn evit berzañ a dra-euzhus-se a nac'h d'ar vugale da zont da vezañ ganet ent-naturel, hag ouzhpenn hep tad... hag un hanter re a vammoù ! Humanae Vitae, kelc'helenn Sant Paol VI, a zistaole dija an dra-se e 1968...

Skinwel : evit gouzout petra eo efedoù drastus ar skinwel war an dud ha pergen war ar vugale klask "TV Lobotomie" war you tube (1^e 30 e pad ar video). Trugarez da P. ar M. .

E miz here e oa bet laeret arrebeuri 'zo eus **iliz Roudoualleg**, tra ma klaskas ti-kêr **Dinan** gwerzhañ kadorioù-kofez hep aotre an eskob, en deus klemmet. Gwall izel eo deuet stad an Iliz da vezañ e Breizh...

Ukraina : Goude bezañ berzet ar ruseg, ar Stad Ukrainat nevez he doa gwelet reter ar riezvroad oc'h en em sevel. E-lec'h rediañ anezhi da gemer ur framm kevreadel en deus asantet F. Hollande plegañ d'an OTAN (d. l. e. d'an Amerikaned) : diwar-se ez eo berzet kenderc'hadoù gounezerezh Breizh war marc'had Rusia, hag e kouezh ar prizioù. E Sant-

Nazer e chom ul lestr-brezel nevez urzhiadet gant ar rused divalav.

Bedelouriezh : En anv ar vedelouriezh, e tanzeer dimp hag e veuler evit gwir ur bed gant tud divro ha direv. Dre se ez eo stourm an Emsav hag an hini a-enep kealiadurezh ar Gender, stourmoù penn-a-raok er mare-mañ, ouzhpenn an hini a-enep al laikouriezh hag a-du gant an tiegezhioù : dre-se emañ Emglev An Tiegezhioù, dinerzh, oc'h arvestiñ ouzh an emgann bedel-se, a lak an dud eus ar Manif evit an Holl da vezañ dilezet gant an holl strolladoù politikel evit mirout outo da sevel o c'hein da virout o fivevezhioù broadel, revel, tiegezhel, relijiel.

Buhez hon Emglev :

E Karaez e Gouel al levrioù ez eus bet tro da gejañ gant kalz a dud, ha gelllet hon eus kinnig hol levr nevez deuet er-maez : Katekiz an Iliz katolik – Diverradur. Madik eo bet gwerzhet, met anat eo e vo ezhomm da bourchas unan all evit ar vugale. E gwerzh e chom bepred 22 euro franko (255 pajennad).

Renta-kont Emgav “Breuriezh Sant Erwan” ar sadorn 11 a viz Here 2014. Seizh den a zo e em gavet e Lannuon d'an devezh studi ha pediñ, un tamm evel re “Kristenion Breizh” etre 1976 ha 1993 a oa bet ken frouezhus, na pa ve ken evit ar gelaouenn Imbourc'h. En devezh-se eo bet studiet “Doareoù padus ar speredelezh relijiel e Breizh”, ur studiadenenn a gaver skrivet gant Maodez Glanndour e 1977 en e gelaouenn “Studi hag Ober” (niv. 22). Unan eus an doareoù padus-se a zo an deoliezh d'an Drinded. A-du e oa an holl evit ober gant “Trinded” kentoc'h eget “Treinded” a zo pell mat diouzh ar ger “Tri” ha diouzh an distagadur a glever e Treger ha n'eo ket hepken e Gwened. An Oferenn a zo bet lidet

e pedlec'h ar presbital. Divizet eo bet kinnig muioc'h a emgavioù e-pad ar bloaz.

Renta-kont “Kanañ en Naoned”. Pevar ezel eus EAT o deus roet lañs d'ur strollad kanañ ha pediñ e brezhoneg. Diganto hon eus resevet ar postel-mañ :

“C'hoant hon eus kenderc'hel gant ar raktres-se ar bloaz-mañ. Kalz traoù zo e bro Naoned evit ar vrezhonegerien, met netra ken speredel. Ar pal evidomp eo kinnig abadennoù evit deskiñ kantikoù brezhonek, hag ivez beilhadegoù evit pediñ ha kanañ e brezhoneg, (e galleg marteze hag e latin un tamm ivez).

Ni a blij deomp kanañ, met n'omp ket sonerien vat. Mat e vefe deomp kavout tud da sikour ac'hanomp : sonerien ha kanerien. Kas a reomp ar bostel-mañ deoc'h e ken kas ho pefe tu da sikour pe da ober bruderezh”.

Katekiz an Iliz Katolik Diverradur



IMBOURC'H

Setu deuet dibenn 2014 gant an niverenn-mañ eus *Kannadig Imbourc'h*, soñjit, mar plij, kas ho skodenn : 15 € (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn) da adkoumanantiñ evit ar bloaz nevez. Trugarez deoc'h en a-raok !

Evit **Nedeleg** ha **Kala-bloaz** profit levrioù : *Poanioù-Spered an Tad Gwazdoue* gant Youenn Olier hag *An Emgav-Chanter* ha *danelloù all* gant Yann Mikael, 18,50 € franko, pep hini. Goulennit ouzh Yann Mikael 12 straed René Giraud44130 Blaen

Nedeleg laouen deoc'h holl, hag hor gwellañ hetoù evit ar bloavezh nevez a zeu : *Levenez, yec'hed hag evurusted leizh ho ti!*

Mererezh :

15 € eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* (18 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X